

*Prigent Daniel (offren bréd)*  
*(60 blavez Bélégiach)*

ENN ABEK

DA

# OFERN BRÉD

Tri-ugentved blavez bélégiach

PÉ

EURED AOUR

DOM I.-F. DANIEL

Person-kanton Lannhuon, Chaloni énoruz, Marc'hek enn  
Urz ann énor

23 A VIZ HÉRÉ 1881

War don : *Jesu, dulcis memoria.*

Otrô 'n Eskob, d'Ec'h trugaré !  
Diskouéz a red, dré hô toaré,  
E fell d'Ec'h, évid-mâd, hirié,  
Enori Tâd ha bugalé.

Otrô Person, d'in aotrét  
Ma vézô eur gir lavaret  
Eûz hô pué ken astennet  
Gant Perc'hen ann nerz, ar iéc'hed.

Pemp ha pévar-ugent vla sô  
Ha daou-c'hant-daou a dévéjô,  
Al lévénez oa brâz 'n'hon brô,  
Ar zent a gané enn Envô :

Eur bugel oa névé c'hanet,  
Ha gand Doué oa dibabet,  
'Vit ma vijé gant-han zalvet  
Inéô hé vreûdeur prénet.

Gret gant-han kolach, séminer,  
Da Blougernevel hen c'hâser,  
'Vit bean vikel ha skôlier :  
Eûz labour daou zén hen c'harger.

Hanvet vikel é Bothoa,  
Santout ra zamméd hé ziskoa  
Eûz labour tri bélek bréma ;  
Mès Doué oa ouz hen nerza !

E Laniskat Person hanvet,  
Hé vec'h ia war greski bépréd;  
Gand ann nerz éz eo dilezet :  
Kuitât pé c'houitoud a zô réd.

Ann Otrô 'n Eskob, dré drué,  
'Vit dere'hel d'éhan hé vué,  
Ha ma teùio hé nerz arré,  
Da Logivy hen c'hâs neûzé.

'Vit-han kalz-kalz a bedennô,  
Kâset, da Berc'hen kement sô,  
Gant kérend ha tûd-vâd hé vrô,  
A zô sélaouet enn Envô.

E triouec'h mîz, ker berr amzer,  
Iéc'hed ha nerz zô deûd d'ar ger.  
Da diskuiza mui n'hen lezfer :  
Da Donkédek mond a renker.

Iliz Tonkédek, c'houi hallfé  
Diskouéz, c'hoaz enn dé a hirié,  
Péger kouls kempennet neûzé  
Oac'h bét gand hô Person névé.

Enô, daouzék vla tréménet,  
Mond é lec'h all zô d'éhan réd.  
Da Iliz ar Roc'h intanvet  
'Vit pried névé eo rôet.

Bélekti, aoter-veûr ar Roc'h,  
Nébeût vé kaved ével-d-hoc'h;  
Ré-bét né vé gwelet kaéroc'h,  
Gret pé prénet gand nébeûtoc'h

Trâ anavéet, trâ gwirion,  
Skouér d'imp rôet gand hon minion :  
Mâd eo d'eur mestr, zôkén Person,  
Bépréd dere'hel-mâd d'al *landon*.

Roc'hiz, enn-hoc'h sô ré a stâd  
Diwar-benn hô Person ker mâd;  
Krédi ret vô gan-ec'h dalc'hmâd :  
Mès, allaz! pébez kalonad!

Kélenner eo d'ec'h c'houéc'h vla sô.  
Mès! eunn dé paotr-al-lizérô  
A digâs d'ar Roc'h eur c'hélô  
A ra d'ec'h skuil kalz a daérô.

Lannhuoniz sô joaussêt,  
Pa'z eo béd ar c'hélô klévet :  
Hô Iliz diintanvézet  
Gand eur bélek 'n'hô zouez ganet.

Lannhuoniz, eunn testéni  
A stâd 'vit Person ar Valy  
A zô deùd eùz ann Eskopti :  
Hô Person zô gret Chaloni.

Eùz Frans ar Penn-sturier d'hé drô,  
'N'eur réi d'ar véléien kroajô,  
Enn deùz unan évid hon brô :  
Da Berson Lannhuon é vô !

Otrô, meür a groaz vé douget,  
Kalz héb ar groaz n'int mann abet,  
Dré ar groaz kalz a vé doujet :  
Gan-ec'h ar groaz sô énoret !

Pénoz paouez héb eur gir c'hoaz ?  
Hon c'henvreür, bréma, a-viskoaz,  
Enn deùz lojeiz 'n'hé galon vrâz ;  
Népréd eur c'henvreür n'hen skuizaz.

Arriet, kenvreür, pa gerfet,  
Hag arriet hép nec'h abet,  
Hé galon zô digor bépréd :  
Ouz tôl, gôlô, lec'h a gaffet.

Lannhuoniz, c'houi dlé, hirié,  
Tridal a gorf hag a iné,  
Larout : Trugaré da Zoué !  
Né drok ket hô Person bemdé !

Daou ha trégont vla, hag ouz-penn,  
Hô Person gwiek, ouz hô rén,  
A disk d'ec'h skler, frez, al lézen :  
Diout-han bét sonj 'n'hô péden !

Kenvreüdeür hag holl vinioned,  
'Vit minion ann holl goulennet  
Ma vô c'hoaz pell 'n'hon touez sac'het,  
Hag enn Env goudé azéet !!!

---

## DOM I.-F. DANIEL

Vikel-vrâz a énor

**13 a viz dù 1881**

---

Mès, koanta kélô zô arré  
Arriet enn hon touez hirié,  
Deùd dré ann hent houarn névé !  
Ar c'henta eo : Péb dén oar zé !

Eunn dé war-n-ugent sô rédet  
Aboé ma oac'h mézévénnet  
Gand ann énorio oa d'ec'h gret,  
Otrô Person : sé oa dléet.

Eunn drâ zô c'hoaz kaéroc'h 'vit sé :  
Mès ann Otrô 'n Eskop c'houvé :  
Well ez eo eunn tammik bemdé  
'Vit n'en eo ré da valarjé!

Eunn tôl diviner ar c'houéka  
Zô gret gand ann Eskob ama :  
Ann *treo fin*, ar ré hétusa,  
A zô mired da divéza.

Ann hent houarn zô binniget;  
Ha raktâl (dén n'enn deûz é géd)  
Tréo lugernuz a zô gwelet;  
Penn ann holl ouz krec'h sô zavet.

Dispaked eo ar binviô ;  
Tridal, lampat ra'r c'halonô ;  
Pétrâ névé 'ta zô er vrô?  
E dorn ann Eskop pétrâ zô!

Eur groaz arc'hant gand aour war-benn,  
E-scourr ouz eur gaer liéten,  
A laka 'n Eskop n'hé gerc'hen  
Da Berson ar Valy laouen.

Otrô Person, hervé 'n histor,  
Aboé pèll zô, c'houi 'c'heuz évor,  
N'eûz Vikel-vràz 'bét a énor  
'Vel-d-hoc'h, c'houi a digor ann ôr!

N'en eo két c'houi hoc'h-unan-penn  
Zô énoret dré 'r stéréden ;  
Eûz ar vrô ann holl Véléien  
Peb-unan en deuz hé lôden.

Rak-sé d'ann Eskop ni larò :  
Trugaré 'vid ann énorio  
A ra da gabiten hon brô,  
Les-hanvet : *Person ar c'hroajo!*

PRGNT, Pn SL.

1881